

494

CHANSON SÉRIUS

VIT HON

EXORTIN D'AR MAD HA DILEZEL AN DROUC

Voar an ton gallec : *Habitant de tout âge...*

Habitantet Breiz-Izel
A galon me ho ped,
Deut da chiléo eur guentel
So n'ho touéz composet ;
Groët he zéo gant attention
Vid han dût ar religion,
Eur Breuriez mad ez eo
Vid rein dézé ners ha couraj
Ha diminuin ho outraj,
Mar gallan dré rimo. (bis.)
An den voar ar bed-man
So laquéet gant Doué,
Hac hon lemno divoarnan
Pa vo hé volanté ;
Mes lest omp n'hon option
Da choaz hon vocation
Pep hinin né désir ;
Nep naquet bars en hent mad,
Deu da neump rentan misérapl :
Ar goms-man so guir. (bis.)
Dar vuez a blijadur
Cazi tout hon deus c'hoant ;
Mes na nequet hon natur
Bézan james contant.
Pa vemp ho hantren n'eur stad
A crédomp ober er fad ;
N'a oëlomp nemert roz ;
Mes ho souten eur rozen
Ordinal à so an drézen,
Ha cals à nezè an eus drein gros. (bis.)
An den en he yoancquis
Ho choaz stad hé vué,
Eman he spéret an divis
Hen balanç hé idé ;
Choantéet quélen an nézan,
Mar heuz muin a noat evitan,
Abréed dec'h a responto :
Lést a hanon em liberté,
Me renco c'heuil ma ide,
N'a ran forç d'ho comso. (bis.)
Agréabl vé ho lézel,
Mar guet bars en hent mad ;
Mes util vez ho quelen
Voar ho stad misérapl :
Clévet bépret moéz Doué,

Na heuillet quet re ho idé ;
Rac cals à gar ho malheur,
Ho véza ré aheurtet,
Gant tréo à deuz n'ho spéret
D'assurin dézé bonheur. (bis.)
Ar bed demeus he gosté
A n'eus propojo mad :
Promettin rei dac'h hir vuez
Hac évuruset n'ho stad,
Chileoet quet hé comso,
Sellet ouz hé obéro,
N'ac à den neuz tromplet
Hac à neuz cad ho malheur,
Laquéet en plaç eur bonheur
Ha névoa dézé promettet. (bis.)
Penos pelloch cat diez
Evit renonç d'ar bed,
Ha quémer eur vreuriez
Da vevan hen secret,
N'an n'a det quet da laret,
Mar grouan-zé vin goapéet
Gant an oll dud eur vro ;
Nep ha rei goap ha hanoch
Ha vo jalous divéoch
Deuz m'a hario he dro. (bis.)
An dud ar muan fervant,
Bars eur réligion,
Ha neuz prestet sermant
Deuz ha greiz ho halon ;
Renoncet ho deuz d'eur bed,
N'an n'ho deuz quet ha dispet ;
Pa voëlon hé maliç,
Cat ha réont trubuillo
Ha zo stag ouz ho hargo,
Mes na mainquet hen supliç. (bis.)
An drubuil ho deuz n'ho état
Cals ane so beurs ar bed :
Diræc ho daoulagat
Ha vent calompniet,
Hipocrite pé hipocrites
Ha vé groët ha nézé allies,
Pé dud och ober ardo ;
An dud eur réligion,
Hervé eur bed diraison,
Neuz gouël zantimancho. (bis.)

Divascler ho taoulagat
Martézé ha vouelfet scler,
Ha sellet bars an tu mad
Po heuz squien d'hober ;
Pélèch hé queffet eur charité,
Mar ho heuz nécessité,
Némert digant an dud-man ;
Me lavar dac'h hen guirione ;
A nep na guar quet Doué
N'a zicour quet hé nessant. (bis.)

An den hep religion
Ne james charitabl,
Carguet heo a occupation
Mez neubut gant eur vad ;
Mar névez treo de divoeret
Ha vézoing goël impliet,
Ho hentin eur viç ;
Hac eur bed oll a lavaro,
Hoaz n'eur guémer hé vado,
Henez héo scandal eur vro. (bis.)

Mar gouëz bars an affliction,
Hac ézomp dézan à sicour,
Neuzé reyo réflexion
Voar eur bed quen treïtour :
Hin neuz roet hé yéhet,
Vid renta servig d'ar bed,
Ha mémes hé vado ;
Hac eur bed né deuz quet amzer
Da sonjal an hé viser
Nac an hé ézomo. (bis.)

Hen pétoré tu ha hetfet
Da houlen as-istanç ;
Eur mestr ha héuz servijet
Ila ra dac'h disméganç,
An dud à religion
Ila yell choaz, dré dévotion,
D'o thi doc'h pisan,
Vid casse dac'h ho frésancho,
Da sicours ho ézommo.
Arriout hé ra quémén-man. (bis.)

Nac ha exempl eur form-zé
A voëler bars eur bed,
Ha choaz goude quément sé
Ha quefver da laret ;
Evid héman ha honnes
Neuz santimancho diez,
N'all den bévan ganté
Rac eur vad ha commandont
Hac han droug à diffennont,
Sé ra an difficulté. (bis.)

Vid caad eur speret contant
Da daoulagat eur bed ;
Renquet disquouen agréamant
D'ar viçi ha voëlet,
Ha lézel pep liberté

Voar pez ha difen Doué ;
Vid bézan sellet mad,
Eur viç ha zo da veulin
Hac eur vertu en décri,
Hervé eur bed miserapl. (bis.)

Heuillet bépret eur réglén,
Rac néquet honnes héo
A lézet eur bed monden ;
Da vexcin ho pué,
Nép ha n'ho ho decriet,
Ha roch ma do tréménet
Ho buez barz eur bed,
N'efvo caad eur vreurieç
Hac hé n'emp gavoign diez
Enni corf ha spéret. (bis.)

Heur rébennac à laro
Eur homzo-man voar zé :
Néquet ret quaat breuriezo,
Vit réglin mad eur vuéz
Oh! zé so eur guirioné,
M'an na néquet d'ho hidé
N'a vefet quet forcet ;
Mes lest nep zo contant
Da vévan tranquilammant
Eur stad ho deuz choazet. (bis.)

Vid respont d'a guément-zé,
Chite aman ma gir,
Ha chouï ha laro goudé
Pénos ha vezo guir :
Cléomp tout clasq moyenna,
Pep himin gouellan m'hallo,
Vid servijin Doué ;
Rentan dézan adoration
Dimeuz ha greiz hon halon,
En pad hon oll vuéz. (bis.)

Reservet ha meuz aman
An neubut propojo,
Vid han dud so ré scan
Ha pront gant ho homso :
Calz ha ve voelloch dézé,
M'a vé hy ha nemp songfe,
Quémer breuriezo,
Vid couézan bars eur viser ;
Maingq voar poent d'hober
D'achuin ho déyo. (bis.)

A nep ha neuz laquet
Eur comso-man en rim,
A so quazi vel fachtet
Ouz an téodo prim ;
Rac cals ha zo mépriset
Voar har bed hep sujet :
Petra zo coz da zé ?
Ré neubut ha garanté
Neuz han eil évid eguilé,
Hac hen quéver Doué. (bis.)

(Propriété.)